

EN HO KAVEL



En ho ka-vel, e korn an tan, En ho ka-vel, e



korn an tan, En ho ka-vel, e korn an tan, Kous-



kit, va bu-ge - lig bi-han, Kous-kit, va bu-ge - lig bi-han.

2

An noz, er mez, a zo tenval,
Hag an avel krenv o sourral.

3

Serrit, sentus, ho taoulagad,
Tra ma vin ouz ho luskellat.

4

Ma ne gouskit ket tro an noz,
Ho mamm a jomo hep repoz.

5

Va bugelig, va c'harantez,
Kouskit ken e vo deut an dez.

6

Pa vo savet ar mintin skler,
E kano 'r c'hillog er penn-ker,

7

Hen a gano « Kokoriko »
Hag ar splannder a zihuno.

8

Splannder an heol var ar meziou,
Bennoz Doue war ar meziou.

J. LE BATON.